

- SIZIUN SANTEL 1989
- goulennou Sant Inigo Loyola

ar
fulenn 13

sul ar Bleuniou ha Pasion an Aotrou - 19 meurzh

Bennigadenn ar skourrou - Al lidadeg-mañ a zegas soñj dimp eus mont-tre Jezuz e Jeruzalem. Deomp eta da-heul "an Hini a zeu en anv an Aotrou". Deomp avat d'e heul betek an amvoudenn vras mar fell dimp dasor-c'hiñ gantañ.

Pedomp Doue hollc'halloudek ha peurbadel, plijet ganeoc'h bennigañ ha santelaat ar badoù hag ar skourrou-mañ. Goude m'hor bo kerzhet gant levez war-lerc'h Jezuz Krist, hor Salver, roit dimp ar c'hras da vont gantañ betek Jeruzalem an Neñvoù. Eñ hag a vev hag a ren a-holl-viskoazh da virviken. Amen!

Jezuz oc'h antren e Jeruzalem evel ur Roue.

PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ 19. 28-40

En amzer-se.

28 Jezuz a yeas er penn a-raok evit pignat da Jeruzalem.

29 Ha pa voe tost da Vefsa ha da Vetaniaz, e-kichen ar menez anvet Menez an Olived, a kases daou eus e ziskibien, en ur lavarout dezho :

30 « It d'ar gariadenn-mañ a-dal deoc'h : hag en ur antren enni e kavot un azenig stag ha n'eus pignet c'hoazh den ebet warnañ. Distagit-erñ hag hen degasit din.

31 Ha ma c'houlenn unan bennak ouzhoc'h perak hen distagit, respontit aval-hen : An Aotrou en deus azhomm anezhañ.

32 Mont a reas war-raok eta ar re a oa kaset, hag e kavjont an traoù evel m'en devoas levarat dezho.

33 Ha p'edont o tistagañ an azenig a c'houlennas a vistri diganto : « Perak e tistagit an azenig-se? »

34 Hag i da respont :

« An Aotrou en deus azhomm anezhañ. »

35 Hen degas a rejont da Jezuz, hag o vezañ teolet o mantilli war goin an azenig, e rejont da Jezuz pignat warnañ.

37 Hag erru a oa tost dija da ziribin Menez an Olived, pa stagas holl engronzh an diskibien trec'het gant al levez, da veuliñ Doue a-vouezh kreñv, evit an holl vuzhudoù o devoas gwelet.

38 Hag e levarant :

« Re vo benniget an hini a zo o tont,

erñ ar Roue, en anv an Aotrou.

Peoc'h an Neñv

ha Klod an uhelderioù ! »

39 Hinienoù eus ar Farizianed hag a oa a-touez ar bobl, a levaras dezhañ :

« Mestr ! gourdrouz da ziskibien. »

40 Met erñ a respontas :

« Me a levar deoc'h, ma tev ar re-mañ eo ar vein a youc'ho ! »

kempedenn - Doue hollc'halloudek ha peurbadel, evit reiñ d'an dud ur skouer da zeskiñ dezho en em izelast, hoc'h eus graet d'hor Salver donet da vezañ den ha mervel war ar Groaz, / plijet ganeoc'h reiñ dimp ar c'hras da gompren ar gentel a habaskted a ro dimp en e Basion ha da gaout perzh en e Adsav a varv da vev. Dre Hor Salver Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou a vev hag a...

kentañ lennadenn - Dirak hon daoulagad e par un dremm, hini ar "Nevel" daswelet pell 'zo gant un diougsner hag a velomp ennañ dremm Jezuz e-

sul ar Bleuniou ha Pasion an Aotrou - 19 meurzh unan, droukroet da gasoni e enebourion, gredus avat e karantez e Dad.

1^{an} LENNADENN

Servijer an Aotrou o tegemer e galon vet a banoù

50. 4-7

LENNADENN EUS LEVR AR PROFED IZAIAS

- 4 An Aotrou Doue en deus roet din teod un diskibl evit ma c'hellin levarout d'an hini a zo skuizh ur ger d'e gonfortiñ.
Bep mintin e tihun din va skouarn evit ma c'hellin selaou evel ma ra an diskibled.
- 5 An Aotrou Doue Hollc'halloudek en deus digoret din va skouarn... N'em eus ket enebet, n'em eus ket souzet a-dreñv (kilet, kerret a-dreñv)
- 6 Va c'hein am eus roet d'ar re a roe bazhad din-me, ha va divjod d'ar re a ziframme va barv.
N'em eus ket kuzhet va fas ouzh an dismegeñsoù hag ar c'hrac'hadennoù (skopadennoù)
- 7 Met an Aotrou Doue Hollc'halloudek en deus va sikouret, setu perak ne santen ket an dismegeñsoù; setu perak em eus lakaet va dremm kalat evel ur maen.

8-9. 17-18a. 19-20. 23-24

SALM 21

R 2a Va Doue ! Va Doue ! Perak hoc'h eus-hu va dilezet ?

- 8 Ar re am gwel a re goap ouzhin 'N ur ober ur yeuskenn, hag hejañ o fenn.
- 9 'N em harpañ 'ra war an Aotrou : ra hen dilivrol Ra savetio anezhañ pa blij kemant dezhañ.
- 17 En-dro din ez eus chas Ur bagad tud fall 'deus va c'helc'hiet Toulllet o deus va daouarn ha va zreid
- 18a Ma c'hellan kontañ va holl eskern.
- 19 Va dilhad a lodennont etrezo War va mantell e taolont o chañs.
- 20 Met c'hwi, Aotrou, na bellait ket ! C'hwi, va nerzh, deredit d'am sikour !
- 23 Brudan a rin hoc'h anv dirak va breudeur E-kreiz ar vodadeg me ho meulo.
- 24 C'hwi hag a zouj an Aotrou, meulit-erñ Ho pet doujañs outañ, c'hwi holl bugale Israel.

eil lennadenn - An Aotrou eo ar C'hrist: setu feiz an Iliz adal an deroù. Gant Paol ez omp pedet, hiziv, da uhelebann ar feiz-se, hon daoulagad savet war-du kros ar Hini en deus en em c'hraet sentus betek ar marv.

2^a LENNADENN

Jezuz izelast ha savet uhel e glori Doue.

LENNADENN EUS LIZHER SANT PAOL DA GRISTENIEN FILIPPOZ

2. 6-11

8 Jezuz-Krist

goude bezañ er stad a Zoue.

- ne gavas ket dezhañ e tlee d'ar c'hel groñs d'e renk a bar da Zoue ;
 7 er c'hontrol, an em ober a reas netra o kemerout furm ur sklavour,
 hag o tonet da vezañ heñvel ouzh an dud ;
 a-zivoez e oa anavezot evel un den,
 8 (hag) an em izelaat a reas c'hoazh muioc'h
 ouzh an em ober sentus betek ar marv,
 ha zoken betek ar marv war ar groaz.
 9 Setu perak en deus Doue e savet d'an uhelañ-holl,
 ha roet dezhañ an Anv-se,
 hag a zo dreist pep anv all.
 10 evit ma teulo pep glin da blegañ en anv Jezuz,
 en neñv, war an douar ha dindan an douar,
 11 ha ma'z anza vo pep teod
 penaos « Jezuz Krist eo an Aotrou, »
 evit gloer Doue an Tad.

KENYOUC'HADEG

Filip. 2. 8-9

Evidomp-ni
 Jezuz-Krist a zo en em c'hraet sentus
 betek ar marv
 ha zoken betek ar marv war ar Groaz,
 Setu perak
 en deus Doue e savet d'an uhelañ-holl
 ha roet dezhañ an Anv a zo dreist pep anv all.

aviel- Sant Lukaz a laka war wel kendruer Doue. Ne ra ket meneg eus kablusted
 ar re-mañ pe ar re-se. Ne skriv netra a-zivout trubarderezh ha marv Ju-
 daz, dilez an Ebestel. Didammal a ra an holl, zoken Pilad. Eñ nemetken a zastum
 ar c'homzoù a bardon: Gantañ hepken e vezo anv eus al laer mat, eus keuzh ar
 c'hantener rovat.

AVIEL

stumm brezañ: 23. 1-49

PASION HON SALVER JEZUZ-KRIST HERVEZ SANT LUKAZ Lk 22. 14-23.56

- L 22. 14 Pa voe deuet an eur, ez eas Jezuz ouzh taol hag an Ebestel gantañ.
 J 15 Lavarout a reas dezho :
 « C'hoant bras am eus bet da zebrñ ar Pask-mañ ganeoc'h,
 kent din gouzefi poan. »
 16 Rak ma a lavar deoc'h n'hen dabin ken, betek ma vo peurgaset da benn
 e Rouantelezh Doue. »
 L 17 Nauze e kemasas ur c'hallir ha goude ur bedenn a drugarez e lavaras :
 « Kemerit kement-mañ; ha lodennit etrezoc'h,
 18 rak ma a lavar deoc'h, adalek bremañ ne avin ken aus frouzsh ar wintenn,
 ken na vo deuet Rouantelezh Doue. »
 19 L Hag e kemasas bara, ha goude ur bedenn a drugarez,
 hen torras hag hen roas dezho an ur lavarout :
 « Kement-mañ eo va c'horf a zo roet evidoc'h;
 20 J grit kement-mañ avit lidañ ar soñj ac'hanon. »
 20 L Ha gent ar c'hallir e reas evel-se ivez goude koan en ur lavarout :
 « Ar c'hallir-mañ eo an Englev Nevez em gwad a zo skuilhet evidoc'h,
 21 Setu evit m'emañ dorn an hini em gwarzsh, ganin-me, war an daol.
 22 Rak Mab-an-den a ya evel m'eo bet divizet; mallozh avat.

- d'an den-se ez eo gwarzhet gantañ. »
 23 L Hag int an em lakass da c'houlenn etrezo pehini anezho ata a os o vont
 d'ober an taol-se.
 24 Tabut a savas ivez etrezo : daoust pehini anezho a os da vezañ
 sellet evel ar brasañ.
 25 Eñ avat, a lavaras dezho :
 J « Rouaned ar broadoù a ra o mistri warno; hag ar re o deus galloud warno
 a vez graet anezho « Madoberourien ar Vro. »
 26 C'hwi avat, arabat ober evel-se : hogen ar brasañ en ho touez ra vezo evel
 an hini yaouankañ, hag ar mestr evel ar servijer.
 27 Pehini eo ar brasañ : an hini a zo ouzh taol, pe an hini a zo o servijer?
 Daoust ha n'eo ket an hini a zo ouzh taol?
 Me avat, en ho touez, a zo evel ar servijer.
 28 Ha c'hwi eo ar re a zo chomet start em c'hichen em amvoudurioù;
 29 ha ma a fell din ober en ho keñver evel m'en deus graet an Tad em c'heñver :
 reñ deoc'h ar galloud-a-rous.
 30 evit ma tebrot ha ma'z evot ouzh va zol em Rouantelezh; ha ma viot azaot
 war drouioù o varn deouzek meurid Israel.
 31 Simon, Simon, setu m'en deus bet sotre Satan diwar e c'houlann d'ho
 krouerian evel gwiniñ;
 32 hogen me am eus pedet evidout, evit na semplo ket da feiz;
 ha te pa vi distroet, starta da vredeur. »
 33 L Met hemañ a respontas dezhañ :
 J « Aotrou, ganit ez on prest da vont ha d'ar prison ha d'ar marv ! »
 34 L Hogen Jezuz e lavaras dezhañ :
 J « Me a lavar dit, Pär, n'en devo ket ar c'hilhog kanet hiziv m'az po dre deir
 gwech nac'het am anavezot. »
 35 L Hag e lavaras dezho :
 J « P'am eus ho kaset hep yalc'h, na bisac'h, na botoù, daoust ha manket
 ez eus bet deoc'h un dra bennak?
 A - Netra ebet (emezo)
 36 J - Met bremañ (emezañ) an neb en deus ur yalc'h, ra gamero anezhi, hag ur
 bisac'h kenkouiz all; hag an neb n'en deus ket a gleze, ra warzho e vantell
 da bremañ unan.
 37 Rak ma a lavar deoc'h e tle ar gomz-mañ eus ar Skritur donet da wir
 ennon-me : laket eo bet e renk an dorfedourien.
 38 E gwirionez, kement a sell ouzhin-me a zo oc'h echuiñ. »
 L Hag int a lavaras dezhañ :
 A « Aotrou, sed smañ deou gleze.
 L Hag e respontas dezho :
 J « Trawalc'h 'zo ! »
 39 L O vezañ eot er-meez, e tennas, evel kustum, war-zu Menez an Olived, ha war e
 lerc'h e teue e ziskibien.
 40 Pa voe erru el lec'h-se, e lavaras dezho :
 J « Pedit evit ne doot ket e temptadur. »
 41 L Hag eñ en em dennas kuit diouto war-hed un taol-meen, hag o vezañ eot war e
 zaoulin, e pede,
 42 en ur lavarout :
 J « Tad, mar fell dit, kas ar c'hallir-mañ diouzhin; koulskoude neket va youl
 me, met da hini-te bezet graet. »
 43 L Nauze en em ziskouzas dezhañ un Ael eus an Neñv evit e gannezhañ.
 44 Ha krog an anken en e sperad, e pede gredusoc'h; hag e teuas e c'hwezenn
 da vezañ evel takennoù gwad hag a zivras war an douar.

sul ar Bleunioù ha Pasion an Aotrou -K- 19 meurzh

- 45 Sevel a reas ouz e bedenn evit mont da gaout e ziskibien, met o c'haout a reas kousket gant an dristidigezh.
- 46 Hag e lavaras dezho :
- J « Perak e kouskit-hu? Savit ha pedit evit ne deot ket e temptadur. »
- 47 L Edo c'haozh o komz, pa'z erruas ur bagad tud, hag an hini anvet Judez, unan eus an Daouzeg, en o fenn, Tostaat a reas hemañ da Jezuz da boket dezhañ.
- 48 Jezuz a lavaras dezhañ :
- J « Judaz, gant ur pok eta sverzhez Mab-an-Dan? »
- 49 L O welout ar pezh a oa da vezañ, ar re a oa gantañ a lavaras dezhañ :
- A « Aotrou, ha ma skofemp gant ar c'hleze? »
- 50 L Hag unan anezho o skeiñ gant mavel ar Beleg-Meur a droc'has dezhañ e skouarn dehoù.
- 51 Met Jezuz o sevel e vouezh a lavaras :
- J « Lezit an traoù da vont. »
- L Hag o vezañ stoket ouzh skouarn an den e pareas anezhañ.
- 52 Neuze a lavaras Jezuz d'ar re a oa deuet a-enep dezhañ : Priñsed ar veleien, Ofiserien an Templ, ha Reoù Gozh :
- J « Evel pa valen ul laer, ez oc'h deuet gant klezeier ha bizhier. »
- 53 Ha ma bemdeiz en ho touez, an Templ, n'oc'h eus ket astennet ho taouarn warnon; met hemañ eo hoc'heuz, an eur ma'z'eo an deñvalijann ar vestrez. »
- 54 L Neuze o kregiñ ennañ e kasjont anezhañ ganto hag e zegas a rejont da di ar Beleg-Meur. Pêr a heulie eus a ball.
- 55 Graet o devoa tan e-kreiz ar porzh hag e oant aezet tro-war-drp, ha Pêr a szezaz en o zouez.
- 56 Met ur vatezh hen gwelas aezet ouzh sklerijenn an tan, ha goude bezañ sellet plizh outañ a lavaras :
- A « Hemañ ivez a oa gantañ! »
- 57 L Met eñ a nac'has en ur lavarout :
- A « Maouez, n'anavezan ket anezhañ. »
- 58 L Nebeut goude, unan all hen gwelas hag a lavaras :
- A « Te ivez a zo unan anezho. »
- L Met Pêr a lavaras :
- A « Va den mat, ne don ket. »
- 59 L Wer-dro un eur goude, unan all a lavara groñs :
- A « Sur-mat, hemañ ivez a oa gantañ, ha neuze Galilead eo. »
- 60 L Hag e lavaras Pêr :
- A « Va den mat, ne ouzon ket petra a lavarez. »
- L D'an ampoent, hag eñ c'haozh o komz, e kenas ur c'hilhog.
- 61 Hag an Aotrou (Jezuz) o vezañ distroet, a baras e sail wer Bêr. Ha neuze e teuas da soñj da Bêr eus ger an Aotrou, p'en devoa lavaret dezhañ :
- « A-raok d'ar c'hilhog kanañ hiziv, az pos nac'het teir gwech am anavezet. »
- 62 Hag o vont er-maez e skuilhas daerou c'hwerer.
- 63 Hogen ar wazed hag a oa o tiwall Jezuz, a rae goap anezhañ, hag hen gwalgase.
- 64 Mouchañ a raent e benn hag a c'houlennent :
- A « Gra da brofed I Piv en deus skoet ganit? »
- 65 L He katz a wallgomzou all a zistagent a-enep dezhañ.
- 66 Pa c'houlouas an deiz, en em vodas Kuzul Re-Gozh ar Bobl, ha Skribed ha Beleien-Vras. Ober a rejont degas Jezuz dirak o lezvern, hag e leverjont :
- A « Mar dout ar Mesiaz, lavar dimp! »
- Hag eñ a respontas dezho :

sul ar Bleunioù ha Pasion an Aotrou -K- 19 meurzh

- J « Mar lavaran deoc'h, ne gredot ket; ha ma ran-me goulennoù ouzhoc'h, ne respontot ket. »
- 68 Met diwar vremañ e vo szezaz Mab-an-Den en tu dehoù da Zous Hollc'halloudek. »
- 70 L Ma lavarjont holl neuze :
- A « Ha te eo Mab Doue eta? »
- L Hag e tisklerias dezho :
- J « C'hwi a lavar mat : Me eo! »
- 71 L Neuze e leverjont :
- A « Da betra hon eus c'haozh ezhomm testen? Ni hon-unan hon eus hen klevet eus e c'hehoù. »
- 23 L Holl dud an emvod a savas neuze, hag e gas a rejont da Bilat.
- 2 En em lakaat a rejont d'e damall evel-hen :
- A « Hemañ hon eus kavet o lakaat reveulzi e-touez hor pobl, hag o vlrout a beañ gwlrout da Gaezar, hag o tisklerias ez eo eñ Mesiaz, Roue. »
- 3 L Neuze Pilat a c'houlennas digantañ :
- A « Ha te eo Roue ar Yuzeviap? »
- L Respont a reas dezhañ :
- J « Te eo hen lavar. »
- 4 L Ha Pilat a lavaras d'ar Veleien-Vras ha d'ar bobl :
- A « Ne gaven netra damall en den-se. »
- 5 L Met i a zalc'he gant nerzh da lavarout :
- A « Lakaet a re mask e-touez ar bobl gant e gelennadurazh dre Judea a-bezh, krogot eo bet e Galilea ha deuet betek amañ. »
- 6 L Pilat war ar c'homzou-se e c'houlennas hag-eñ e oa an den-se Galilead.
- 7 Ha pa glevas edo dindan vell Herodez e kavas anezhañ da Herodez hag ei, em gsv e Jeruzalem, en deizloù-se.
- 8 Herodez, pa welas Jezuz, a voe laouen-bras, rak abaoe pell amzer en devoa c'hoant d'e welout, abalamour d'ar pezh en devoa klevet diwar e benn; hag esperout a rae gwelout ur burzhud bennak graet gantañ.
- 9 Ober a reas goulennoù outañ gant forzh gerioù, met Jezuz ne respontas netra dezhañ.
- 10 Eno koulskoude edo ar Veleien-Vras hag ar Skribed hag hen tamalle gant nerzh.
- 11 Herodez hag e warded goude bezañ graet fae warnañ ha goude bezañ graet goep anezhañ, a wikas dezhañ ur sae liv aplann-mourbet, hag hen kavas en-dro da Bilat.
- 12 Adalek en deiz-se e teuas Pilat hag Herodez da vezañ mignoned, eus a enebourien ma oant disgent.
- 13 Pilat eta, goude gervei ar Veleien-Vras, ar Pennoù-bras hag ar Bobl, a lavaras dezho :
- A « Degaset hoc'h eus din an den-mañ evel unan o tougen ar bobl d'ar reveulzi, ha setu m'am eus graet dirazoc'h enklask ha n'em eus kavet en den-mañ netra o reiñ krog d'an tamalloù a rit dezhañ. »
- 15 Hag Herodez kennebeut, p'egwir en deus hen adkasat dimp en-dro, Sklaer eo, menn n'en deus graet hemañ a gement a dalvezfe ar merv.
- 16 Rak-se eta, goude bezañ hen kastizet, hen laoskin da vont. »
- 17 L Hogen ret e vaze dezhañ reiñ dezho da gaver pep Gouel-Pask, frankiz ur prizoniad.
- 18 Met holl an em k'kjont da griat esamblez :
- A « Ar merv da hemañ, ha laosk ganimp Barrabaz. »
- 19 L Hemañ, abalamour d'un tani, diaspac'h bennak bet a kêr, ha d'ur muntr, a oa bet taolet er prizon.

sul ar Bleunioù ha Pasion an Aotrou -K- 19 meurzh

20 Ha Pilat adarre a gomzas outo gant ar c'hoant da leusket Jezuz da vont.
 21 Met i a zalc'he da grial :
 A « Stag anezhañ ouzh kroez ! Stag anezhañ ouzh kroez ! »
 22 L Evit an trede gwech e lavaras dezho :
 A « Pe zroug eta en deus graet an den-mañ ? Netra a gement
 e dalvezfe ar marv n'em eus kavet ennañ. Rak-se eta, goude bezañ fen
 kastizet, hen laoskin da vont. »
 23 L Int avat, a zalc'he start gant kriadegoù bras da c'houlenn ma vije staget ouzh
 kroez, hag a trac'he o mouezhioù.
 24 Neuze Pilat a zougas ar setaas : reiñ o goulenn dezho.
 25 Leusket a reas eta ganto an hini a oa bet, abalamour d'un taol-dispac'h
 ha d'ur muntr taolet er prison, an hini a c'houlennet
 Jezuz avat, a laoskas en o bolontez.
 26 Pa oant ouzh e gas ganto, e taoljont o dorn war un den, Simon ar C'hurenead,
 hag a oa o tonet eus ar park, hag e sammjont ar Groez warnañ evit he dougen
 war-lerc'h Jezuz.
 27 Ur bobl vras a dud hen heulle, an o zouez merc'hed hag a skoe war boull o
 c'halon hag a hirvoudes warnañ.
 28 Treiñ a reas Jezuz war-zu enno hag e lavaras :
 J « Merc'hed Jeruzalem, na ouellit ket warnon; kentoc'h goullit warnoc'h
 hoc'h-unan ha war ho pugale.
 29 Rak setu o tonet deizioù ma vo lavaret : Evurus ar gwraez difrouezh, an
 daoug ostezioù n'o deus ket ganet bugale hag an divronnoù n'o deus ket
 neget.
 30 Neuze en em lakaent da lavarout d'ar mezezioù : Kouezhit warnomp !
 ha d'an torgennoù : Kuzhit ac'hanomp !
 31 Rak ne reer evel-hen d'ar c'hoed glas, petra a c'hoarvezzo gant ar c'hoed
 sec'h ? »
 32 L Daou all a gased gantañ, daou dorfedour, evit bezañ lakaet d'ar marv.
 33 Ha pe voent erruet al lec'h anvet Kalvar, e stagjont anezhañ ouzh ar Groez,
 hag an dorfedourien ivez, unan an tu dehoù hag egile an tu kleiz.
 34 Jezuz a lavare :
 J « Tad, pardon dezho, rak ne ouzont ket petra emaint oc'h ober. »
 L Neuze a rejont lodennoù gant e zilh ha tennañ o chañs warno.
 35 Ar bobl a chome eno da sellout, hag ar pennoù-bras a ree goap anezhañ
 en ur lavarout :
 A « Re all en deus salvet; ra en em salvo e-unan, mar deo Mesiaz Doue,
 an Hini dibabet ! »
 36 L Ar soudarded ivez a c'hōarzh goap warnañ : tostaat a reent ha gwinegr
 a ginnigent dezhañ,
 en ur lavarout :
 A « Mar dout-te Roue ar Yuzevien, en em salv da-unan. »
 37 L Bez'e ivez ur skrid a-us d'e benn :
 « Hemañ eo Roue ar Yuzevien. »
 38 Unan eus an dorfedourien hag a oa w-pign eno, a lavare gwallgomzoù dezhañ :
 A « Ha n'eo ket te eo ar Mesiaz ? En em salv da-unan ha ni ivez. »
 39 L Met egile a respontas dezhañ gant komzoù rust :
 A « Ne zouez ket Doue zolen, te, goude ma'z out barnet d'ar memes kastiz ?
 40 Evidomp-ni ez eo justis, ni a zo o paeñ evit hon gwalloberoù ;
 met hemañ n'en deus graet droug ebet. »
 41 L Hag e lavare :
 A « Jezuz, bez soñj ouzhin, pe zeul e gloar da Rouantelezh. »
 42 L Hag e respontas dezhañ :

sul ar Bleunioù ha Pasion an Aotrou -K- 19 meurzh

A « E gwirionez dit-te a lavaras : hiziv e vin ganin ar Baradoz. »
 44 L Bez'e oa a-benn neuze war-dro kreisteiz, hag en em ledas teñvalijenn
 war ar vro a-bezh, a badas betek tenñ eur goude kreisteiz; an heol a oa
 deuet ur voügadenn warnañ.
 45 ha gouel an Templ a rogas dre an hantor.
 46 Neuze en ur leusket ur griadenn vras, Jezuz a lavaras :
 J « Tad, etre da zaouarn e fizian va spered. »
 L Ha gant ar c'homzoù-se, e laoskas e hused diwezhañ.
 47 Pa welas ar c'hantener ar pezh a oa c'hoarvezet, e rentas gloar da Zoue
 en ur lavarout :
 A « A dra sur, an den-mañ a oa un den reizh. »
 48 L Hag an holl vagadoù-tud hag a oa en em zastumet evit gwelout an arvest-se,
 pa welljont petra a oa en em gavet, a yeas war o c'hiz en ur skeiñ
 war boull o c'halonoù.
 49 Holl dud e anaoüdegezh en em zalc'he a-ziabell, ha ganto ar gwraez o devoa
 e heuliet adalek Galilea hag a selle ouzh an traoù-se.
 50 Ha setu ma oa un den anvet Yosel, ezel eus ar C'huzul-Mour, un den mat ha reizh
 51 - hennezh n'en devoa asantet na d'o mennad, na d'o oberoù -
 Genidik e oa eus Arimazea, ur gêr a Judea, hag eñ ivez a c'hoarzoas
 Rouantelezh Doue.
 52 Hennezh a yeas da gaout Pilat evit goulenn korf Jezuz.
 53 Hen diskenn a reas diouzh ar Groez, hon gronnañ en ul liñsel hag he lakaat
 en ur bez kleuzet er roc'h, e-lec'h ne oa bet lakaet c'hoazh den ebet.
 54 Deiz ar Ragozadur (deiz ar Pourchasoù) e oa, ha dija e lugerna gouleier ar Sabad.
 55 Ouzh e heul edo ar gwraez, ar re a oa deuet gant Jezuz eus Galilea;
 sellout a rejont er vat ouzh ar bez hag ouzh ar stumm ma oa bet lakaet korf
 Jezuz.
 56 Hag o vezañ distroet war o c'hiz, ec'h aozjont louzeler a c'hwez-vat ha frondoù;
 Ha deiz ar Sabad e virjont ar renoz gourc'hemennet gant al Lazenn.

NOTENN Teir-Lennadenn a zo merket evit ar sulvezh-mañ, ha net eo o lavarout o-zeir, nemet e vefe
 un abeg bras bennak o virout, Koulskoude e c'hell ar beleg lenn unan hepken eus al
 Lennadennoù a-reak an Aviel, pe diouzh rei zoken lenn hepken aistor ar Pasion, ar
 stumm berrañ anezhi zoken. Hogen ne sell komenti-se nemet evit ouz ar oferiner li-
 det evit ar bobl.

pedenn war ar profoù- Aotrou Doue, ho pediñ a reomp dre Basion ho Mab unganet,
 na zaleit ket da reiñ dimp ho pardon. Gwir eo ne veri-
 tomp ket e gaout, met selsovit kentoc'h madelezh ho kalon, evit hor pardonañ,
 dre c'halloud an Aberzh-mañ, aberzh hep e bar. Dre Jezuz Krist, hon Aotrou. Amen
 rak-kanenn veur - prefas sul ar Beuz - E gwirionez, Tad santel, Doue hollc'hal-
 loudek ha peurbadel, un dra reizh ha dleet eb ho trugarekaat
 e pep lec'h hag e pep anzer, dre Jezuz Krist, hor Salver. Eñ hag en deus teur-
 zet gouzav poan evit ar bec'herion, evitañ da vezañ glan ha divlam. Eñ hag en
 deus teurvezet bezañ kondaonet evit tud kablus, evitañ da vezañ didamall. Dre
 e Varv, ez eo bet gualc'het hor pec'hedoù ha dre e Adsav d'ar Vuhez, en deus ro-
 et dimp reizhded ha santelezh. Bremañ, an Neñv hag an daouar, an Aeled hag an
 Arc'haeled a gan gloar ha neuleudi, en ur lavarout da viken:

antifonenn ar c'heduniñ- Va Zad,mar ne c'hell ket ar c'haliriad-mañ trêmen, hep na vije evet ganin,ra vq graet da youl.

pedenn goude keduniñ- Bremañ paz omp bet maget gant ho road santel,setu ar bedenn a reomp deoc'h,Aotrou Doue,a greiz kalon:Dre ho Mab lakaet d'ar marv evidomp,hoc'h eus roet dimp an esperañs da gaout ar madoù a gredomp enno, grit dimp eta,dre vertuz e Adsav d'ar vuhez,mont betek penn hon hent,ho Paradoz. Dre Jezuz Krist,ho Mab hag hon Aotrou a vev hag a ren,Doue...

Va c'hein am eus roet
d'ar re a roc bazhad din-me
ha va divjod d'ar re
a ziframme va barv...Izaiaz 50



D'an eur m'en deus Jezuz debret e bred diwezhañ gant e dud,en em vod ar geduniezh evit advevañ ar Rred meur-se. An urzh d'hen ober a zo bet roet dimp gantañ."Grit kement-mañ evit ober koun ac'hanon.",ha plijout a ra dimp hen ober,dreist-holl da gefiver an deiz-ha-bloaz.

kanenn mont-tre- Dleet eo dimp lakaat hor gloar e Kroaz hor Salver Jezuz Krist Ennañ enañ hor silvidigezh,hor buhez,hon adsav d'ar vuhez. Drezomp ez omp salvet ha dasprenet.

kempedenn- Aotrou Doue,emaomp o lidañ KOAN SANTEL HOR SALVER,ho Mab unganet,pa savas a-raok mervel an Aberzh nevez ha peurbadus ha pa lakaas Pred Santel e garantez etre daouarn an Iliz,plijet ganeoc'h eta kargañ hor c'halonou a garantez hag a vuhez,dre Mister ken bras-se. Dre Hor Salver Jezuz Krist.

lennadenn gentañ- Lidadeg ar Pask,e koun Englev Doue gant e Bobl,a zo ganti un neuz nevez paz eo sevenet ha treuzfurmec gant Jezuz.

1an LENNADENN

«Kentañ Koan-Bask gant ar Yuzevion, En Ejipt, gourc'hemennou war al Iid-se.»

LENNADENN EUS LEVR AR ERMAEZIADeg 12,1-8, 11-14

- 1 En deizioù-se e lavaras an Aotrou (Doue) da Voizez ha da Aaron, e Bro Ejipt :
- 2 « Ar miz-mañ a vo evidoc'h ar c'hentañ eus mizioù ar bloaz.
- 3 Komzit ouzh holl vodadeg Israel ha livirit dezho :
« D'an dekvet deiz eus ar miz-mañ, ra gemero pep-hini unan eus ho chatal munul, ul loen dre bep li.
- 4 Mar ne vez ket a-walc'h a dud en li evit debrñ al loen, ec'h en em glevo gant e amezeg, an hini nesan d'e di, hervez an niver a dud; derc'hel e reot kunt eus naon pep hini evit merkañ niver an debrerion.
- 5 Bez'e vezo al loen, ul loen disi, par, ul loen-bloaz; hen kemerout a reot e-lovez an deñved pe ar givri.
- 6 Hen mirout a reot betek ar bevarzekvet deiz eus ar miñ-mañ, hag holl bobl bugale Israel hen lazho d'abardaez-noz. Kemerout a raint eus e wad hag hen lakaint war zaoubost ha war c'hourinoù dorioù an tiez 'lec'h ma vezo debret.
- 8 Debrñ a raint ar c'hig en noz-se; debret e vezo goude bezañ hen rostet ouzh an tan, gant baraennoù dic'hoell ha legumaj c'hwerv.
- 11 Setu penaos hen debrot : ur gouriz en-dro d'ho kroazell, bolou en ho treid, ur vazh en ho torn, ha c'hwil hen debro a-herr : rak Pask an Aotrou ez eo.
- 12 En noz-se e tremenin dre vro Ejipt hag e skoin gant pep kentañ-ganet war zouar an Ejipt, re an dud evel re al loened; hag ober a rin bamedigezhioù a-enep holl zoueoù an Ejipt. Me eo an Aotrou.

ar yaou ganbrliid

- 13 Hogen ar gwad a servijo deoc'h da sin da verkañ an tiez e-lec'h ma viol
ha pa welin ar gwad, e tremenin e-biou deoc'h; ha ne vezo a
walam a-gastizen lo touez, pa skoin gant bro Ejipt.
- 14 Hag an vez-se e vezo evidoc'h un deiz da evorin ha c'hwï hen miro
evel ur gouel d'an Aotrou hag hen lidañ a reot a rumm da rumm evel ur
c'hiz peurbadus.

SALM 115 12-13, 15-16bc, 17-18.

¶ (cf 1 Kor. X, 16 :

AR C'HALIR A VENNOZH A VENNIGOMP
HAG ENN'EO KEY KOMMUNION GANT GWAD AR C'HRIST ?

- 12 Petra a rentin-me d'an Aotrou (Doue)
Evit an holl vad en deus graet din ?
- 13 Kalir ar silvidigezh a gemerin
Hag anv an Aotrou a bedin.
- 15 Prizius ez eo ouzh daoulagad an Aotrou
Marv e vignoned
- 16 Me, ho servijer, mañ ho servijerez
Hoc'h eus diskoulmet din va liammoù (ereoù)
- 17 Deoc'h e kinnigin ar sakrifis a veuleudi
Hag anv an Aotrou a c'halvin.
- 18 Va gouestloù d'an Aotrou a sevenin
Dirak ar bobl a-bezh !

eil lennadenn- Pred an Aotrou a zo un herez a zo bet lezet ganimp gantañ. Ha
gourc'hemennet en deus e lidañ a-gevret.

2° LENNADENN


« Bep tro ma tebrit ar bara-mañ ha maz evit ar c'haliriad-mañ, ec'h embannit marv an Aotrou
betek ma teuto. »

LENNADENN EUS LIZHER KENTAN SANT PAOL DA GRISTENION
GORINTOZ 11, 23-26

- 23 Bredeur ! Me am eus resevet digant an Aotrou
ar pezh tremenet deoc'h d'am zio
An Aotrou Jezuz, en noz ma oa gwerzhet, a gemeras bara,
ha goude ur bedenn a drugarez, hen toiras hag a lavaras :
- 24 « Hemañ eo va c'horf roet evidoc'h. Grit kement-mañ evit ober
an evoradur ac'hanon. »
- 25 Evel-se ivez, goude bezañ koaniet, e kemeras ar c'halir en ur lavarout :
- 26 « Hemañ eo Kalkriad an Emglev Nevez em gwad. Grit kement-mañ,
bewech ma'z evot dioulañ, evit ober an evoradur ac'hanon. »
Bep tro eta ma tebrit ar Bara-mañ ha ma'z evit ar C'haliriad-mañ,
ec'h embannit marv an Aotrou, betek ma teuto. »

¶ a-raok an Aviel Yn 13, 34

UR GOURC'HEMENN NEVEZ A ROAN DEOC'H :
EN EM GAROUT AN EIL EGILE, EVEL M'AM EUS HO KARET.



AVIEL

«Betek ar penn-pellañ e karas e dud.»

PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN 13, 1-15

- 1 A-raok Gouel Pask, Jezuz o c'houzout e oa deuet e eur da dremen eus bed-mañ davel e Dad, goude bezañ karet e re a oa er bed, o c'haras betek ar penn-pellañ.
- 2 E-kerz koan, n'en devoa dija an diaoul lakaet e kalon Judaz, mab Simon Iskariot, ar soñj d'e werzhañ.
- 3 Jezuz o c'houzout en deus an Tad lakaet pep tra etre e zaouarn, e oa deuet eus Doue hag e tistroe davel Doue.
- 4 a sav diouzh taol, a denn diwarnañ e zilh, ha goude bezañ kemeret ul liemenn e lak anezhi en dro d'e gorf;
- 5 neuze e taol dour er plad, hag en em lak da walc'hiñ treid e ziskibien ha d'o zerc'hañ gant al liemenn a oa en dro dezhañ.
- 6 Dont a reas eta da Simon-Pêr, hag hemañ da lavarout dezhañ :
« Aotrou, le gwalc'hiñ ün va zreid ? »
- 7 Responn a reas Jezuz dezhañ, en ur lavarout :
« Ar pezh a ran-me, n'hen komprenz ket bremañ, mel intent a ri diwezhaloc'h. »
- 8 Lavarout a reas Pêr dezhañ : « Nann, ne walc'hi ket va zreid din biken. » Jezuz a responnas dezhañ : « Mar ne walc'han ket ac'hanout n'az po ket a lod ganin. »
- 9 Lavarout a reas Simon-Pêr dezhañ : « Neuze, Aotrou, n'eo ket hepken va zreid, mel ivez va daouarn ha va fenn. »
- 10 Lavarout a reas Jezuz dezhañ : « An hini a zo bet en dour, n'en devez mui ezhomm nemet da walc'hiñ e dreid, rak glan eo penn-da-benn. Ha c'hwi, glan ez oc'h, mel n' oc'h ket holl. »
- 11 Rak gouzout a rae piv a zlee e werzhañ, setu perak en devoa lavaret : N'oc'h ket glan holl.
- 12 Goude bezañ eta gwalc'het o zreid dezho, ec'h adkemeris e zilh, e c'hourvezas adarre ouzh taol hag e lavaras :
« Ha kompren a ri-hu ar pezh am eus graet deoc'h ?
Va envel a rit « Mestr » hag « Aotrou », ha mañ a lavarit, rak bez'ez on.
Mar am eus eta, me, hoc'h Aotrou hag ho Mestr gwalc'het deoc'h ho treid, c'hwi ivez a zle gwalc'hiñ ho treid an eil d'egile.
Rak skouer am eus roet deoc'h, evit ma reot evel m'am eus graet deoc'h »

war ar profoù- Roit dimp ar c'hrañ, ni ho ped, Aotrou Doue, da zarempredañ ar Misterioù-mañ, evel maz eo dleet, rak bep tro ma vez lidet Aberzh an Oferenn e vez adneveset labour hor silvidigezh. Dre Jezuz Krist, hon rak-kanenn veur - prefas Sakramant an Aoter - E gwirionez, Tad Santel, Doue holl c'halloudek ha peurbadel, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer, dre Jezuz Krist, hor Salver. Eñ eo ar Beleg gwirion ha peurbadel a zo en em roet deoc'h evit hor silvidigezh hag en deus desket d'e ziskibien penaos derc'hel da lidañ e Aberzh. Ha ni, hervez m'en deus

gourc'hemennet, a ginnig deoc'h e brofadenn, en ur gaout soñj anezhañ. Hag e Pred santel an Aoter e tebromp anezhañ, Bara ar Vuhez, evit diskleriañ Mister e Varv, betek ma tistroio. Rak-se, umanet gant an Aeled hag an Arc'haeled ha gant holl Speredoù galloudus an Nefvoù, e kanomp meuleudi d'ho kloar, en ur lavarout da viken:

- antifonenn ar c'heduniñ - Hemañ eo va C'horf roet evidoc'h. Hemañ eo kaliriad an Englev Nevez em Gwad, em hor Salver. Grit kement-mañ bevec'h maz evot dioutañ, evit lidañ ar soñj ac'hanon.
- pedenn goude keduniñ - Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, selaou hor pedenn: evel ma vezomp maget, er bed-mañ, gant KOAN SANTEL ho Mab, grit tellezimp (veritimp) kaout hor gwalc'h anezhi, er bed all, da virviken. Dre.....
- treuzkaserezh ar C'herrin Santel - Ar Sakramant meulet ra vezo a zo kaset bre-mañ d'al lec'h ma vezo miret. Betek kreiznoz e veilh an Iliz gant Jezuz. Iremen a rin eta amzer gantañ. En un doare e-eun ha seder. En ur brennañ va daoulagad e sellin ouzh Jezuz e-kerz ar Goan ziwzhañ hag e liorz an Olived. Sellout a ran, selaou a ran, kejañ a ran gantañ. Prederiañ a ran war ster e gomzoù hag e jestroù. En em lezel a ran da we-lout ha da oberiañ eveltañ.



Ermaeziadeg

"An deiz-se a zo evidoc'h un deiz da envoriñ..."

Chom a reomp sioul en ur soñjal en hor pec'hedoù-ni hag e pec'hedoù ar bed, hag en ur c'houlenn pardon anezho digant Doue.

kempedenn- Aotrou, ni a oar hoc'h eus evidomp ur garantez divuzul, c'hwi ha n'hoc'h eus ket dinac'het reiñ ho Mab hoc'h-unan, met hoc'h eus roet anezhañ evit salviañ an holl dud. Hiziv c'hoazh, diskouezit dimp ho garantez. Ni a fell dimp mont da heul an Aotrou Krist, EA hag a gerzh eus e benn e-unan war-du ar marv. Deuit d'hon harpañ evel m'hoc'h eus EA harpet ha santelait ac'hanomp e Mister e Bask. Dre Jezuz Krist, hor Salver. Amen!

Iennadenn gentañ- Dindan tresoù ar Nevel doaniet ez eus gant an Testamant Kozh un doalenn froumus ragenpentet eus Pasion an Aotrou Krist.

Pevare Santik Servijer an Aotrou

TOULLET ED NET EN ABEG D'HOR PEC'HEIOU
BREVET ABALAMOUR D'HON DROUGBEROU.

1 an LENNADENN

LENNADENN EUS LEVR AR PROFED IZAIAS 52, 12-15, 53, 1-12

- 13 Setu va servijer a ralo berzh (a zeulo da vad)
Kreskiñ a ralo, sevel a ralo, ha lakaet e vo uhel-meurbet!
14 Sabatuel e oa bet tud e-leizh diwar e benn.
E zremm diswalc'het ne oa mui heñvel ouzh hini un den,
e stumm ne oa mui hini an dud.
15 Bremañ avat e chom bamel outañ ar pobloù niverus,
hag ar rouaned a seir o genoù dirazañ
53,1 Piv en devije kredet d'ar pezh hon eus diskleriet?
Ha da biv eo bet diskuilhet brezh an Aotrou?
2 Kresket en deus dirazañ evel ur voutadenn
evel ur wrizienn en douar sec'h.
Ne oa gantañ na kaerder na kened da dennañ hor selloù.
Ne tra en e stumm d'hon lakaat d'e garout.
3 Disprizet ha dilezet gant an dud,
den a c'hilac'har, anavezet gant ar boan,
heñvel ouzh ar re a vouchet penn dirazo,
disprizet e oa, ha ni ne raomp van ebel outañ.
4 Ha koutskoude e louge hor c'hleñvejoù,
ha sammel en devoa hor poanioù warnañ e-unan,
Ha ni a soñje ganimp e oa kastizet
skoet gant Doue, hag izelaet!
Ar c'hastiz hag a zo dimp ar peoc'h en deus gouezet warnañ,
ha dre e vloksadennoù an hini ez omp bet yac'hael.
4 Holl e omp dianket evel deñved,
pep hini ac'hanomp o vont gant e hent e-unan,
hag an Aotrou en deus lakaet da gouezhañ warnañ
hor fallagriez dimp-ni holl.
7 Gwallgasel eo bet ha n'em deus ket enebet,
- N'em deus ket digoret e c'henoù.

Evel un oan a gaser d'ar gigerез,
evel un dañvad o chom sioul dirak an hini a douz anezhañ
n'en deus ket digoret e c'henoù.

- 8 Sammel eo bet kuit dre nerzh ha dre vamedigezh,
haplva soñj difenn e groaz?
Rak lamet eo bet eus douar ar re vev
ha skoet betek mervel evit hor pec'hedoù.
9 Merket ez eus bet dezhañ ur bez e-louez an dud fall
ha laket eo bet e bez un den pinvidik,
goude n'en devoa graet tra direizh ebet
ha goude na eo bet louellerezh (tromplezon) ebet en e c'henoù.
10 Met plijet eo bet gant an Aotrou e vevañ dre ar boan.
Goude bezañ kinniget e vuhez en aberzh (saktifis) evit ar pec'hed,
e wele ul lizez diwarnañ, ha deizioù hir en devezo,
hag a drugarez dezhañ e levio da wir youl an Aotrou.
11 Abalamour da boanioù e ene
e welo ar sklerijenn hag e walc'h en devezo.
Dre e c'hloazioù, va Servijer a rento just mareadoù-lud
en ur zougen e-unan o drougberou.
12 En abeg da se e roin 'vit ma lod dezhañ pobladoù,
lodennañ a ralo ar gonidoù gant ar Re C'halloudek
dre ma'z eo en om toet e-unan d'ar marv
ha dre ma'z eo bet renket e-louez ar bec'herion,
hag en o tougen pec'hedoù kalz
hag oc'h erbediñ evit ar bec'herion.

SALM 30 2 & 6, 12-13, 15-16, 17 & 25

19 Lk 23, 46 TAD, ETRE DA ZOUARN E LAKAN VA SPERED

- 7 Ennoc'h, Aotrou, emañ va repu,
Arabat em befe lec'h da ruziañ
Hervez ho justis, va dilivrit!
6 Etre ho taouarn e sizon va spered
Va daspren a reot, Aotrou, o Doue Israel.
12 Evit va holl enebourion ez on un dra vezhus
Evit ma amezien un dra rukunus
Ar re am gvel war ar ru
A dec'h pell diouzhin.
13 Ankouaet ez on gant ar c'halonoù evel un den marv,
evel ur besel torret ha reputuet.
15 Me avat, a laka va esper ennoc'h, Aotrou,
Lavarout a ran : va Doue ez oc'h.
14 Etre ho taouarn emañ va buhez
Va diframmit eus daouarn va enebourion.

guener ar groaz

- 17 Lakit ho Fas da skedin war ho servijer
Saveteit ac'hanon dre ho karantez.
25 Chomit start, nerzhit ho kalon.
C'hwi holl hag a esper en Aotrou !

eil lennadenn- Al Lizher d'an Hebreed a zegas soñj eus anken Jezuz dirak ar marv, oc'h uhelgomz avat eus frouezh dibar e boanioù. Hanterourez peurvat Mab Doue a ro tro d'an den da gaout kendruez.

2^o LENNADENN

« Keskell en deus e skol ar boan petra eo ar sentidigezh, hag evit kement hini a sent outañ ez eo deuet da vezañ mammenn a silvidigezh. »

LENNADENN EUS AL LIZHER D'AN HEBREED 4. 14-16, 5, 7-9.

Breudeur !

- 14 P'hon eus eta ur Beleg-Bras uhel-meurbet hag en deus treuzet an neñvoù,
Jezuz, Mab da Zoue, miromp start ar Feiz a anzavomp.
15 Rak ar Beleg-Bras hon eus ni n'en ket unan divarrek da druzeñ
ouzh hor gwanderioù; er c'hontrol, bez'ez eo unan hag a zo bet,
dre ma oa heñvel ouzhimp, aprouet e pep tra, nemet ar pec'hed.
16 Tostaomp eta gant fiziñs ouzh tron ar c'hras, evit ma resevimp
trugarez ha ma kavimp gras evit kaout sikour e koulz vat.
5.7 Eñ an hini eo, e-pad an deizioù m'edo o vevañ en ur c'horf-den,
a ginnigas pedennoù ha goulennoù gant kriadennoù bras ha daeroù,
d'an Hini a c'helle hen saveteiñ diouzh ar marv;
ha selaouet e voe abalamour d'e zoujañs :
8 evitañ da vezañ Mab e teskas e skol ar poanioù petra eo
ar sentidigezh,
9 hag ur wech lakaet peurvat e-unan, e leuas da vezañ,
evit kement hini a sent outañ,
mammen a silvidigezh peurbadus.

V. A-RAOK AN AVIEL Fil. 2, 8-9.

Ar C'hrist a zo en em c'hraet sentus evidomp,
Betek ar marv, ha zoken betek ar marv war ar Groaz.
Abalamour da se, Doue en deus e savet d'an uhelañ-holl
dreist pep anv all.

AVIEL

PASION HON SALVER JEZUZ KRIST hervez Sant Yann.
Yann 18, 1 - 19, 2

- L 1 En amzer-se ez eas Jezuz gant e ziskibion en tu all d'ar froud,
ar C'hedron, d'ul lec'h ma oa ul liorzñ
hag ez antreas enni, eñ hag e ziskibion.
2 Judaz Ivez, an trubard, a anavezet al lec'h-se, rak alies e oa bet Jezuz
eno gant e ziskibion.
3 Judaz eta, o vezañ kemeret gantañ ar gompagnunezh-soudarded

guener ar groaz

- na neuze gwarded a-berzh ar Veleien-Vras hag ar Farizianed, a zeuas di
gant letenioù, torchadoù-gouloù hag armoù.
4 Ha Jezuz o c'houzout kement a oa d'en em gaout gantañ, a yeas etrezek
enno hag a lavaras dezho :
J « Piv a glaskil-hu ? »
L 5 Hag i da respont dezhañ :
A « Jezuz a Nazared »
L Jezuz a lavar dezho :
J « Me eo ! »
L Judaz, an treitour, a oa ganlo.
6 Kerken ha n'en devoa lavaret dezho : « Me eo ! », e souzjont a-dreñv,
hag e kouezhjont d'an douar.
7 A-nevez eta, e c'houlennas diganto :
J « Piv a glaskil-hu ? »
L Hag i a lavaras :
A « Jezuz a Nazared. »
L Jezuz a respontas :
J 8 « Lavaret em eus deoc'h ez eo me eo, mar deo me a glaskil,
lezil ar re-mañ da vont kuit. »
L 9 Ha kement-se evit ma leuje da wir ar gomz en devoa lavaret :
« Eus ar re ac'h eus roet din, n'em eus kolllet hini ebet. »
10 Neuze Simon-Pêr hag a oa gantañ ur c'hleze, hen lennas hag a skoas
gant mevel ar Beleg-Meur, hag a droc'has dezhañ e skouarn dehoù ;
anv ar mevel-se a oa Mal'hoz.
11 Met Jezuz a lavaras da Bêr :
J « Laka da gleze en c'houin Ar c'h'aliriad en deus an Tad roet din,
daoust ha ne evin ket anezhañ ? »
L 12 Neuze ar gompagnunezh gant ar c'homandant ha gwarded ar Yuzevien
a grogas e Jezuz hag e liammas.
13 E gas a rejont da gentañ da di Annaz hag a oa tad-kaer da Gaifaz,
Beleg-Meur er bloaz-se.
14 Kalfaz a oa an hini en devoa roet ar c'huzul-mañ d'ar Yuzevien :
« Ar gwellañ eo e varvfe un den hepken evit ar bobl. »
15 Hogen da heul Jezuz e teue Simon-Pêr hag un diskibl all ;
an diskibl-se a oa anavezet gant ar Beleg-Meur ;
antren a reas gant Jezuz e porzh ar Beleg-Meur.
16 Pêr avat, a oa chomet e-tal an nor, er-maez. Mont a reas eta an diskibl all
se hag a oa anavezet gant ar Beleg-Meur, da gomz ouzh ar borzhieriez ;
hag e reas da Bêr antren.
17 Neuze ar valezh-se, ar borzhieriez, a lavar da Bêr :
A « Ha n'out ket le ivez unan eus diskibien an den -se ? »
L Hag e respont :
A « N'on ket. »
L 18 Edo ar servijerien hag ar warded en o sav ouzh an tanglaou o devoa graet,
o tommañ, rak yen e oa an amzer, ha Pêr ivez a oa ganlo en e sav o
tommañ.
19 Ar Beleg-Meur eta a leas goulennoù ouzh Jezuz diwar-benn e ziskibien
ha diwar-benn e gelennadurezh. 18

gwener ar groaz

- 20 Respont a reas Jezuz dezhañ :
 J « Me'm eus komzet fraezh ouzh ar bed-holl. Me'm eus bepred kelennet
 er sinagog hag en Templ e-lec'h m'en em vod an holl Yuzevien, hag
 e-kuzh n'em eus lavaret netra.
 21 Perak e c'houlennet diganin ? Goulenn digant ar re o deus klevet
 petra'm eus lavaret dezho. Ar re-se end-eeun a oar petra 'm eus lavaret. »
 L 22 Goude m'en devoa lavaret ar c'homzoù-se, unan eus ar warded hag a oa eno,
 a roas ur fasad da Jezuz en ur lavarout :
 A « E-giz-se e respontez d'ar Beleg-Meur ? »
 L 23 Jezuz a respontas dezhañ :
 J « M'am eus lavaret droug, diskouez an droug-se ;
 mel mar am eus komzet mat, perak e skoez ganin ? »
 L 24 Neuze Annaz e gasas ereet da Gailaz, ar Beleg-Meur.
 25 E-pad ar c'heit-se edo Pêr en e sav o tommañ. Ma lavarjont dezhañ :
 A « Daoust ha n'out ket le ivez unan eus e ziskibien ? »
 L Nac'hañ a reas hag e lavaras :
 D « N'on ket ! »
 L 26 Unan eus servijerien ar Beleg-Meur, kar d'an hini en devoa Pêr troc'het
 dezhañ e skouarn, a lavar :
 A « Daoust ha n'eo ket le am eus gwetel el liorzha gantañ ? »
 L 27 Hag adarre e nac'has Pêr, ha raktal ur c'hilhog a ganas.
 28 Neuze e kasont Jezuz eus ti Gailaz d'ar pretordi ;
 ar beure 'oa ; int-l'aval, n'antrjont ket er pretordi evit na vijent ket
 saotrel ha ma c'helljont debrin ar Pask.
 29 Pilat eta a zeuas er-maez davelo, hag a lavaras :
 A « Peseurt lamall a rit-hu a-enep an den-mañ ? »
 L 30 Respont a rejont dezhañ :
 P « Mar ne vije ket hemañ un tortedour, n'hor bije ket e lakaet etre
 da zaoarn. »
 L 31 Ha Pilat da lavarout dezho :
 A « Kemerit-er, c'hwi hoc'h-unan, ha barnit-er hervez ho lezenn. »
 L Ar Yuzevien a lavaras dehañ :
 P « N'hon eus ket ar gwir da lakaat den d'ar marv. »
 L 32 Hag an dra-se evit ma leuje da wir ar gomz en devoa lavaret Jezuz
 da verkañ dre be varv e llee mervel.
 33 Neuze e tistroas Pilat e-diabarzh ar pretordi ; gervel a reas Jezuz
 hag e lavaras dezhañ :
 A « Ha le eo Roue ar Yuzevien ? »
 L 34 Respont a reas Jezuz :
 J « Daoust hag ac'hanout-le da-unan e lavarez kement-se, pe reoij all o deus
 hen lavaret dit diwar va lenn ? »
 L 35 Respont a reas Pilat :
 A « Daoust hag ez on-me ur Yuzev ? Da bobl hag ar Veleien-Vras o deus da
 lakaet etre va daouarn, Petra'c'h eus grael ? »
 L 36 Ha Jezuz da respont :
 J « Va Rouantelezh-me n'eo ket eus ar bed-mañ. Mar bije eus ar bed-mañ e
 vije va Rouantelezh-me, va gwarded o devije stourmet evit mirout na

gwener ar groaz

- vijen lakaet etre daouarn ar Yuzevien ; bremañ avat, va Rouantelezh-me
 n'eo ket ac'han. »
 L 37 Pilat a lavar dezhañ :
 A « Neuze 'ta, roue ez out ? »
 L Respont a reas Jezuz :
 J « Evel ma lavarez-le ez on roue. Abalamour da gement-mañ ez on bet
 gamel, hag abalamour da gement-mañ ez on deuet er bed : evit reiñ
 festeni d'ar wirionez. Hag an hini a zo patri-ar-wirionez a selaou
 va mouezh. »
 L 38 Pilat a lavar dezhañ :
 A « Petra eo ar wirionez ? »
 L Ha goude bezañ lavaret kement-se ez eas er-maez adarre da gaout ar
 Yuzevien, hag e lavar dezho :
 A « Me, ne gavan ennañ abeg ebet d'e gondaonin.
 39 Peogwir emañ ar c'hustul ganeoc'h e laoskfen ganeoc'h ur prizoniad
 bennak e-kerz Pask, daoust hag e fell deoc'h e laoskfen ganeoc'h Roue
 ar Yuzevien ? »
 L 40 Neuze e krogjont adarre da huchal en ur lavarout :
 P « Ket hemañ, mel Barabbaz ! »
 L Barabbaz 'oa ur forban.
 41 Neuze Pilat a gemeras Jezuz hag a reas e skourjezañ :
 2 Hag ar soudarded o vezañ plezhennet ur gurunenn -spenn, he lakas war e
 benn, hag ur vantell ruz a wiskjont dezhañ.
 3 Tostaat a raent dezhañ hag e lavarent :
 P « Salud, roue ar Yuzevien ! »
 L hag e listagent palvadoù gantañ.
 4 Mont a reas Fijat er-maez ur wech c'hoazh, hag e lavar dezho :
 A « Selu ! hen degas a ran deoc'h er-maez, abalamour deoc'h da c'houzout
 ne gavan abeg ebet ennañ. »
 L 5 Neuze e teuas Jezuz er-maez gantañ ar gurunenn-spenn war e benn, hag
 ar vantell ruz. Hag e lavar Pilat dezho :
 A « Selu an Den ! »
 L 6 Met ouzh e welout ar Veleien-Vras hag ar warded a youc'has
 en ur lavarout :
 P « Ouzh ar groaz ! Ouzh ar groaz ! »
 L Pilat a lavar dezho :
 A « Kemerit-er c'hwi hoc'h-unan, ha stagit-er ouzh ar groaz,
 rak evidon-me, ne gavan ennañ abeg ebet. »
 L 7 Ar Yuzevien a respontas dezhañ :
 P « Ni hon eus ul lezenn, hag hervez al lezenn e llee mervel,
 rak da Vab Doue ez eo en em lakaet. »
 8 Pa glevas Pilat ar gomz-se e voe spontet muioc'h c'hoazh.
 9 Mont a reas d'ar pretordi adarre hag e lavar da Jezuz :
 A « Eus a belec'h out-le ? »
 L Met Jezuz ne roas respont ebet dezhañ.
 10 Pilat eta a lavar dezhañ :
 A « Ha nac'h a rez komz ouzhin-me ? Daoust ha ne ouzout ket em eus

gwener ar groaz

- L 11 galloud d'az lezel da vont ha galloud d'az lakaat-le ouzh kroaz ?
 Responn a reas Jezuz :
- J « N'az pije warnon-me galloud ebet, mat ne vije ket bet roet dil eus an
 nec'h; rak-se, an hini en deus va lakaet etre da zaouarn, en deus
 brasoc'h pec'hed. »
- L 12 Diwar se, e klaske Pilat an tu d'e lezel da vont, met ar Yuzevien a hope
 en ur lavarout :
- P « Mar Laoskez hemañ da vont, n'out ket ur mignon da Gaezar; rak kement
 hini en em dremen da roue, en em sav a-enep da Gaezar. »
- L 13 Pilat eta, o klevout ar c'homzoù-se a reas degas Jezuz er-maez hag a
 azezas war e gador-a-vamer, el lec'h anvet Lihostrotos, ar Pavez, en
 hebreeg Gabbaza.
- 14 Deiz Ragaozadur ar Pask e oa, war-dro kreisteiz, hag e lavar d'ar
 Yuzevien :
- A « Setu ho roue ! »
- L 15 Met ar re-mañ a youc'has :
- P « D'ar marv ! D'ar marv ! Stag anezhañ ouzh kroaz ! »
- L Lavarout a ra Pilat dezho :
- A « Ho roue a stagiñ-me ouzh kroaz ? »
- L Ar Veleien-Vras a respontas :
- P « N'hon eus roue ebet nemet Kaezar ! »
- L 16 Neuze e roas anezhañ dezho da vezañ staget ouzh kroaz.
 Kemer a rejont eta Jezuz (d'e gas ganlo)
- 17 hag etre an ur zougen e-unan e groaz, a yeas etrezek al lec'h anvet Kalvar
 ar C'hloppenn (PENN-MARV), pe, evel ma leverer en hebreeg : Golgota.
- 18 Eno e voe staget ouzh ar groaz, ha gantañ daou all unan a bep lu
 ha Jezuz er c'hreiz.
- 19 Pilat a reas ivez skrivañ ur skritell hag he lakaat ouzh ar groaz.
 Warni e oa skrivel « Jezuz a Nazared, roue ar Yuzevien. »
- 20 Lennel e voe ar skritell-se gant kalz a Yuzevien, rak stok ouzh kêr edo
 al lec'h ma oa bet staget Jezuz ouzh ar groaz. Ha skrivel e oa en hebreeg,
 e latin hag e gresianeg.
- 21 Kaer o devoa Beleiien-Vras ar Yuzevien lavarout da Bilal :
- P « Arabat dil skrivañ « Roue ar Yuzevien », met « Hemañ en deus lavaret : Me
 eo roue ar Yuzevien. »
- L 22 Responn a reas Pilat :
- A « Ar pezh am eus skrivel, am eus skrivel. »
- L 23 Neuze ar soudarded, goude bezañ lakaet Jezuz ouzh kroaz a dapas e
 zilhag hag a reas peder lodenn ganto, ul lodenn evit pep soudard, hag ivez
 e sae. Homañ aval, a oa hep gwri ebet, ha bet gwiadet en ur pezh eus an
 nec'h d'an traoñ.
- 24 Lavarout a rejont eta an eil d'egile :
- A « Arabat dimp he regin; met tennomp hor chañs warni da welout gant piv
 ez aio. »
- L Hag an dra-se evit ma teuje da wir ar Skritur : « Lodennel o deus va
 dilhad kenetrezo, ha war va sae o deus lennel o chañs. » Setu aze petra
 'reas ar soudarded.

gwener ar groaz

- 25 En o sav e-kichen kroaz Jezuz edo e vamm ha c'hoar e vamm, Mari, gwreg
 Klopaz, ha Mari-Madalèn.
- 26 Ha Jezuz o welout e vamm, hag en he c'hichen, an diskibl a gare, a lavar
 d'e vamm :
- J « Maouez ! Setu da vab. »
- L 27 Da c'houde e lavar d'an diskibl :
- J « Setu da vamm ! »
- L Hag adalek neuze, an diskibl he c'hemeran en e di.
- 28 Goude-se, Jezuz o c'houzout e oa peurc'hraet pep tra hiviziken, a lavar
 evit ma vije kaset da wir ar Skritur :
- J « Sec'hed am eus ! »
- L 29 Ur pod a oa eno leun a winegr; ur spouemkarget a winegr a voe lakel e bez
 ur gorzenn-hisop hag a voe lostaet d'e c'henoi.
 Goude bezañ kemeret ar gwinegr, Jezuz a lavaras :
- J « Peurechu eo ! »
- L Hag o vezañ soublet e benn, e rentas e spered.
- 31 Hogen ar Yuzevien, o vezañ ma oa ar Ragaozadur, evit na chomje ket ar
 c'horfoù ouzh kroaz deiz ar Sabad - rak un deiz bras e oa eus ar Sabad-se
 a c'houlennas digant Pilat ma vije torret dezho o divc'har ha ma vijent
 savet kuit.
- 32 Dont a reas eta ar soudarded, ha d'an hini kentañ e lorrjont e zivc'har ha
 neuze d'an eil hag a oa bet staget ouzh kroaz a-unan gant Jezuz.
- 33 Met o lont da Jezuz, pa weljont e oa marv a-benn neuze, ne dorjont ket e
 zivc'har dezhañ.
- 34 Hogen unan eus ar soudarded gant e c'hoar, a doullas dezhañ e gostez
 hag e teuas raktal er-maez gwad ha dour.
- 35 An hini en deus gwelet a ro testeni a gement-se - ha gwirion eo e desteni,
 hag hennezh a oa e lavar ar wirionez - evit ma kredot c'hw'i ivez.
- 36 Rak c'hoarvezet eo an traoù-mañ evit ma teuje da wir ar Skritur :
- J « Askorn ebet anezhañ ne vo torret. »
- 37 Ha c'hoazh en ul lec'h all e lavar ar Skritur :
- J « Sellout a raint ouzh an hini a deus loullet. »
- 38 Goude-se Josef a Arimatea hag a oa diskibl da Jezuz, met e-kuzh gant aon
 rak ar Yuzevien, a c'houlennas digant Pilat aotre da sevel kuit korf Jezuz.
 Aotre a roas Pilat; donet a reas Josef eta da sevel korf Jezuz.
- 39 Dont a reas Nikdem ivez, an den-se hag a oa bet en noz o kaout Jezuz
 diagent; degas a rae gantañ ur c'hemmesk a yir hag aloez, ur c'hant lui-bouez
 bennak.
- 40 Kemer a rejont eta korf Jezuz hag hen hen pakañ a rejont gant bandemou
 en ur lakaat gantañ louzoù c'hwaz-val, vel m'emañ giz ar sebellañ gant ar
 Yuzevien.
- 41 Bez'e oa el lec'h ma oa bet staget ouzh kroaz ul liorz, hag el liorz-se
 ur bez nevez na oa bet c'hoazh lakaet den ebet ennañ.
- 42 Eno eta, o vezañ emedo deiz ar Ragaozadur gant ar Yuzevien, ha dre ma oa
 lost ar bez, e lakjont Jezuz.

GOULENNOU SANT INIGO LOYOLA

Ene an Aotrou Krist, lakit ennon santelezh.
Korf an Aotrou Krist, lakit ennon silvidigezh.
Gwad an Aotrou Krist, lakit ennon mezvidigezh.
Dour kostez an Aotrou Krist, lakit ennon naetadurezh.
Pasion an Aotrou Krist, lakit ennon nerzh.
O Jezuz madelezhus, va selaouit.
E-barzh ho koulioù va c'huzhit.
N'aotreit ket din bezañ disrannet diouzhoc'h.
Ouzh an enebour fallakr va difennit.
Da eur va marv va galvit
ha gourc'hemennit din mont davetoc'h,
m'ho meuliñ gant ho Sent,
penn-da-benn ar c'hantvedoù. Amen!

(pedenn hag a c'hell bezañ lavaret goude ar gomunion)

troet gant A.B.K.

prizh 3 lur

AR FULENN a zo kaieroù
evit harpañ buhez speredel
ar vrezhoned badezet.

chomlec'h:
presbital 29223 Plouneour-Menez